

# EN HENOR DA ZANT ERWAN

*War don* : Gwerz koz Zant Erwan.

DISKAN.

Pedomp, pedomp a greiz kalon,  
Pedomp Zant Erwan hon Faeron,  
Ma vo bepred hon Avokad  
Dirak Hon Zalver hag he Dad.

1.

En-kreiz an drizekved kantved,  
Tost da Landreger oa ganet ;  
War douaro ar Minihiy,  
En Kervarzin e oa he dy.

2.

D'ean, en kichen he gavel,  
Doue lakas eur vamm zantel,  
En he c'halon ar brassan c'hoant  
E vije he mabik eur zant.

3.

Evit d'he vamm kad 'n'he genver  
Eur garante nerzuz, tener :  
« Welloc'h, emei, eo d'id mervel  
» 'Vit ober eur pec'hed marvel. »

4.

O Zant Erwan, dre ho peden,  
Zikouret ar mammo kristen  
Da zevel mad ho bugale,  
D'ho zevel en doujans Doue.

5.

Er ger, en-pad he iaouankiz,  
Ha diweatoc'h en Pariz,  
Erwan 'roë da dud he noad  
Skuerio zantel, kelenno mad.

6.

Da vo, dre holl, en Breiz-Izel,  
An dud iaouank outan henvel,  
'Vit ma c'helfint, o vean fur,  
Chom korf hag ine bepred pur.

7.

Dre ma oa Erwan zantel braz,  
Eskob Treger hen belegaz ;  
Hag ar zant, en he stad neve,  
A deuz zantelloc'h bemde.

8.

En Tredrez, hag en Louanek,  
E labouras ken kalonek  
Ma lakas an holl vertuio  
Da diwanan er c'halono,

9.

Zant Erwan, deuz ar baradoz,  
Ni ho ped, skuillet ho penoz  
War veleien hon farroujo  
Karget d'hon c'hass holl d'an  
[Nenvo.

10.

Erwan a rae d'ar bec'herien  
Dont da vean gwir gristenien ;  
Dre he gomzo, fe an dud vad  
A deue bemde da grenvât.

11.

Zant Erwan, evidomp goullet  
Ar c'hras da drei kein d'ar pe-  
[c'hed,  
Ha da delc'hel ar fe 'n'hon bro  
Gwriennet stard 'vel an dero.

12.

Erwan a oa den a beden,  
Hag ive den a binijen ;  
Na weler den o vont da zant,  
O kâd d'he gorf re a damant.

13.

'Vit plijout d'hon Faeron Zantel,  
Bemde da bedi 'vimp fidel ;  
Ni delc'ho mad da lezenno  
Ar c'hoareiz hag ar vijelo.

14.

En kenver an dud ezommek  
Erwan oa meurbed karantek ;  
En ho c'henver e oa ken mad  
Ma hanvent anean ho zad.

15.

Eveltan a dle peb kristen  
Herve ma c'hell, rei aluzen ;  
An aluzen 'ra da Zoue  
Skuill he venoz war an ine.

16.

Bebet en neuz hon Faeron ker  
War hon mezio pellik amzer ;  
Tostik d'ar mor eo bet ive  
Eur loden vraz euz he vue.

17.

O Zant Erwan roët eta  
Ho penoz da dud ar vro-ma ;  
Beniget ar re a labour  
War an douar, pe war an dour.

18.

En Breiz, ha zoken en pell bro,  
Erwan eo brudet he hano  
Dre ar burzudo en neuz graet  
'Vit an dud klanv ha mac hagnet.

19.

Zant Erwan, dre ho pedenno,  
Hon zikouret en hon ioanio ;  
Goullet evit ho pugale  
Iec'hed ar c'horf hag an ine.

20.

Erwan gant an holl zo hanvet  
Zant Paeron an Avokaded ;  
Dalc'hmad e oa prest da difenn  
An dud dister hag ar bevien.

21.

Paeron gallouduz bro-Dreger,  
Gwelet a ret, en hon amzer,  
Gwirio an Iliz dispennet :  
En han' Doue ho difennet !

22.

Ha, pa c'himp dirak hon Barner  
Beet ive hon difenner,  
Ma vo d'imp laret gant Doue :  
« Deut ganin da balez an Ne ! »

J. B., s. j.

**Imprimatur :**

Brioci, die 11<sup>e</sup> Aug. 1899.

M. LE PROVOST, v. g.